




Stumdi
aozadur-stummañ war ar brezhoneg
organisme de formation au breton

*Plijout a ra deoc'h
skrivañ istorioù e
brezhoneg ?*

Stummadur *Formation*

Mont da skrivagner brezhonek *Devenir auteur en langue bretonne*

Kevelet gant Levrioù ha len-
nadennoù e Breizh, Dizale ha
Le Groupe Ouest



GALV DA LAKAAT E ANV - 2014 -

Evit kement hini a garfe gwellaat e varregezhioù evit sevel skridoù

(kazetennerien, kelennerien, embannerien, senarierien... evit an dud a vicher hag ar re all)

Rekis eo gouzout skrivañ mat ar brezhoneg.

STUMMADUR « mont da skrivagner » dalc'h 2014

2 vodul :

Modul 1 ar sevel skridoù lennegel brezhonek

Modul 2 ar binvioù evit rakskrivañ senarioioù

Kasit ho teuliad emstrivañ a-raok an deiziadoù-mañ :

Modul 1 : 20/09/2014

Modul 2 : 20/11/2014

Modul 1 ar sevel skridoù lennegel brezhonek

Evit piv eo ar stummadur ?

Evit kement hini a zo oar skrivañ reizh e brezhoneg hag a garfe gwellaat e varregezhioù evit sevel skridoù lennegel.

Dleout a ra an emstriverien bezañ troet-kenañ gant an oberennoù lennegel ha gant liesseurted an doareoù da sevel skridoù.

Palioù ar stummadur

Anavezout gwelloc'h ar frammoù, an doareoù da broduiñ ha da skignañ ar c'hrouidigezhioù lennegel a-vremañ.

Degas tammoù anaoudegezh war ar perc'hennañ kefredel hag ar seurtoù kevratoù stag.

Arnodiñ doareoù danevelliñ a bep seurt gant stalioù-skrivañ.

Studiañ degouezhioù : kaout ur sell a-vremañ war glad lennegel ar brezhoneg : troc'hoù ha kendalc'hegezh.

Ar stalioù-se a vo o fal mont tre en doareoù danevelliñ a zo d'ar brezhoneg.

Penaos lakaat e anv evit kemer perzh ?

A-raok an 20/09/2014 e vo dav d'an danvez stajiad kas an traoù amañ dindan d'ar greizenn stummañ Stumdi (Maner Keranden BP 311 29800 LANDERNE) ha dre bostel da gClaudie Malnoë, ar renerez (claudie.stumdi@wanadoo.fr)

- Ur CV

- Ur skrid div bajenn d'ar muiañ ma vo displeget gant an danvez stajiad perak e karfe kemer perzh er stummadur kinniget amañ
- Ar goulenn kemer perzh (pajenn 3)

Pegoulz ?

Eus an 20 betek an 31 a viz Here 2014, da lavaret eo div sizhunvezh (80 eurvezh stummañ).

E pelec'h ?

E Maner Keranden (kreizenn stummañ STUMDI) e Landerne.

Stummerien

Stummerien barrek war ar skrivañ e brezhoneg (Stumdi), ha perzhidi eus Levrioù ha lennadennoù e Breizh.

Module 2 ar binvioù evit rakskrivañ senarioioù

Evit piv eo ar stummadur ?

Evit kement hini en deus skiant-prenet war ar sevel skridoù : senarier, aozer-sevener, teknikour sinema, skoazeller skrivagner brezhonek...

Palioù ar stummadur :

Reiñ d'ar berzhidi ur bladennad klok eus ar binvioù hentennel pennañ a-fed sevel frammoù dramaoù evit ar sinema en ur studiañ skouerioù pleustrek.

Gwelout petra eo ar binvioù rekis evit ma vefe nerzhus an istor (« an nerzh danevelliñ »).

Deskiñ pishaat « ene an istor ».

Arnodiñ ar binvioù-se gant skouerioù pleustrek ha frammet.

Dont da anavezout an endro a denn d'ar vicher-se (skoazelloù arc'hant evit sevel skridoù, produiñ).

Penaos lakaat e anv evit kemer perzh ?

A-raok an 20/11/2014 e vo dav d'an danvez stajiad kas an traoù amañ dindan d'ar greizenn stummañ Stumdi (Maner Keranden BP 311 29800 LANDERNE) ha dre bostel da gClaudie Malnoë, ar renerez (claudie.stumdi@wanadoo.fr) :

- Ur CV
- Ur skrid div bajenn d'ar muiañ ma vo displeget gant an danvez stajiad perak e karfe kemer perzh er stummadur kinniget amañ
- Ar goulenn kemer perzh leuniet klok (pajenn 3), ha dre ar post hepken

Pegoulz ?

Eus ar 7 a viz Kerzu betek an 19 a viz Kerzu 2014, da lavaret eo div sizhunvezh (80 eurvezh stummañ).

E pelec'h ?

Sizhunvezh kentañ (adalek ar sul 7/12) : e Plouneour-Traezh (e ti Le Groupe Ouest) e vioc'h o chom asambles evit aesaat ar soubidigezh, ar c'hrouiñ hag an eskemmoù. Evit ar chomadenn skrivañ-se ne c'haller ket degemer ouzhpenn 12 perzhiad e-pad 6 devezh.

Eno e kavint un endro labour graet evit ar sevel skridoù, evit ma vefe heligentañ ha kenskoazell, hag an aod er gweledva a vroudo o ijin.

Eil sizhunvezh : e Maner Kernaden (savadur ar greizenn stummañ Stumdi) e Landerne

Stummerien

1 senarier a vicher, gantañ kalz a skiant-prenet war penaos ober gant meizadoù diazez an dramaouriezh ha war ar sevel skridoù evit ar sinema ha/pe ar faltazi er skinwel.

2 c'hourseller raktres

Dav eo deoc'h gouzout e vo galleg ha/pe brezhoneg gant ar stummerien eus Stumdi barrek war ar skrivañ e brezhoneg ha gant ar guzulierien-senarierien eus Le Groupe Ouest.

Doareoù an dibab evit an daou vodul

- Evit kadarnaat eo bet rakdibabet ho teuliad e vo kaset ur postel deoc'h 10 deiz d'ar muiañ war-lerc'h ma vo kloz ar galv da raktresoù.
- Ma vezit dibabet da gemer perzh er prantad stummañ-mañ ne vioc'h degemeret da vat nemet pa vo bet resevet ar rakpriz sinet (ma vez arc'hantaouet ho stummadur ganeoc'h pe gant un ti-produiñ) pe ur gouestl digant un aozadur arc'hantaouiñ (ma vez kemeret e karg gant un AKDA (OPCA) bennak) ha nemet ma vez plas a-walc'h.

Goulenn kemer perzh

Modul 1 ar sevel skridoù lennegel brezhonek

Module 2 ar binvioù evit rakskrivañ senarioioù

Anv-familh :

Anv-bihan :

Pellgomz :

Chomlec'h postel :

Chomlec'h-post :

M' emaoch e soñj da c'houlenn ur skoazell arc'hant digant ar Stummadur Dibaouez eo pouezus gwiriañ gant hoc'h aozadur arc'hantaouiñ hag-eñ hoc'h eus gwir da gaout unan. (Leugnit ar fichenn-mañ)

Skrivagner oc'h ? YA KET

Astaler oc'h ? YA KET

Ho micher :

Goprad oc'h en un embregerezh ? YA KET

Karg :

Anv an embregerezh :

Pellgomz :

Chomlec'h :

Den e karg eus ar stummañ :

Chomlec'h postel :

Ur statud all hoc'h eus ? Pehini ?

Gant piv e vo paeet ar stummadur ?

- Gant un aozadur arc'hantaouiñ / Pehini ? (da skouer : AFDAS, Fongecif, Uniformation...)
- Gant un embregerezh ?
- Gant Pol Implij, ma 'z oc'h klasker labour ?
- Gant an ti-produiñ oc'h stag outañ ?
- Ganeoc'h hoc'h-unan ?

Ha kaset e vo deoc'h peadra (ar rakpriz hag ar programm dre ar munud) d'ober ho koulenn skoazell digant hoc'h aozadur arc'hantaouiñ ? YA KET

Evit lojañ ha debriñ e kinnigomp prizioù marc'hatet d'ar berzhidi. Ha karout a rafec'h kaout ur rakpriz evit ar frejoù bod ha boued-se ? YA KET

E-touez ar reolennoù hollek : Ne vioc'h degemeret da vat da gemer perzh nemet pa vo bet resevet ar rakpriz sinet (ma vez arc'hantaouet ho stummadur ganeoc'h pe gant un ti-produiñ) pe ur gouestl digant un aozadur arc'hantaouiñ (ma vez kemeret e karg gant un AKDA (OPCA) bennak) ha nemet ma vez plas a-walc'h.

Deiziad ha sinadur :

Ar goulenn-mañ zo da gas klokaet d'ar chomlec'h-mañ :

Kreizenn stummañ Stumdi – maner Keranden BP 311 29800 Landerne